

D'ar Sadorn 22 a viz Mae 2010

Al liorzh

Plijout a ra da galz a dud ober war-dro o liorzh. Evit plijadur ar gweled nemetken pe evit dastum bleunioù, legumaj ha frouezh. Kaout un tamm liorzh a zo ur skol vat evit ar vugale da zont da anavezout an natur.

Fin skrivadeg ar CE

.....
Kement a seurtoù liorzhoù hag a liorzherien, a lavarer. Ur c'hempouez a glasker tizhout bepred etre ar pezh a c'hoantaer hag ar pezh a c'heller ober.

Un dachenn c'hoari a-zoare evit ar vugale hag o zud e vo al letonnennoù. Diwallit, avat, ne blij ket kaer ar melloù tennoù bolotenn d'ar bleunioù bresk, na d'ar broñsoù tener...

*Fin skrivadeg ar CM
ha rummad kentañ an oadourien*

.....
Sin a zouar mat e vefe kaout gozed en ho leton. Eno e kavont o gwalc'h a breñved hag a vuzhug. Turiañ, digeriñ riboulioù ha sevel bernioù douar a ouzont. O degemer eta pe klask kaout an dizober anezho ?

Ouzhpenn leton ez a plant a bep seurt, louzoù, bleunioù, legumaj, bodoù, gwezigoù ha gwez d'ober hol liorzhoù.

*Fin skrivadeg ar skolaj
hag eil rummad an oadourien*

.....
Hadañ, plantañ, liesaat diwar skoultr, a bep seurt micherioù a vez d'ober. Pengennadoù bleunioù reizhet eeun, bevennet gant girzhier beuz troc'het berr pe liorzhoù gouesoc'h, evel ma plijo ganeoc'h.

Ret e vo deoc'h gouzout e koulz hag e kentel benañ, diskourrañ, imboudiñ gwez pe imboudiñ plant diwar wrizioù...

Bezeta vezo, Yann liorzher koulz ha Katell liorzherez a vamo ouzh o zrevadoù. Bleunioù, louzoù fin, legumaj pe frouezh a vefe anezho.

*Fin skrivadeg al lise
ha trede rummad an oadourien*

.....
Nag a c'hwez, avat, kent gellout eostiñ ! Palarat a ranker, marrat, rastellat, c'hwennañ, douarañ, temzañ ha louzaouiñ.

Pe lorc'h pa zeuio war daolioù ar c'heginou triñchin ha perisilh, sivolez, bent, roumarin ha munudig, ognon ha chalotez, kignen, pour ha karotez, irvin-ruz, fav-glas ha fav-munut, piz-bihan, tomatez, kourjetez, kaol-fleur hag artichoad, avaloù-douar ha kement 'zo !

Pe c'hoazh frouezh chugonus ha saourus, dous, trenk pe c'hwerv da lakaat ho tent da dozoniñ. Lus, kastrilhez, mouar, irin, flamboez ha spezad, per ha mesper, avaloù, prun, polos, gwregon, pechez, kerez ha kignez...

Diwallit, memestra, diouzh ho mignoned askellek, piged, mouilc'hi, boc'hruzged, pennduiged, pintiged, pabored, beufiged... betek-gouzout ez afe ho lodenn ganto !

Fin skrivadeg an oadourien varrekañ